


KANTIK AR SKOL GRISTEN

DISKAN :

*Kanomp, kanomp da virviken
 Enor ha gloar d'ar skol gristen,
 D'ar skol a ra d'ar vugale
 Anaout ha karet o Doue.*



1.

Pegen eürus ar parrezioù
 O deus, dre forz aluzennou,
 Savet, hervez o liberte,
 Skoliou kristen d'o bugale.

2.

Er skol gristen ne vezint ket
 Skoliet evel ar baianed,
 Hep hanoc'h morse, 'hed an deiz,
 Nag eus Doue nag eus ar Feiz.

3.

Er skol-se mistri, mestrezed,
 Bep sul, bep gouel, a ya bepred,
 Gant kerent ha bugaligou,
 D'an Iliz 'vit an offisou.

4.

Kement skol gristen 'zo digor
 A lak Kroaz Jezuz en enor ;
 Araok ha goude labourat,
 Eno 'vez graet eur bedenn vat.

5.

Ar skol gristen d'ar vugale
 A zesk da genta hent an Nenv,
 Rak ar genta deskadurez
 Eo hent an Nenv, ar zantelez.

6.

Doue hon Tad, gwir Vestr ar bed,
 Skuilhit ho pennoz, ni ho ped,
 War ar skol gristen, ma c'hello
 Derc'hel ar Feiz start en hor bro.

7.

Grit ma vo sentus pep hinif
 Ouz lezenn stris an Eskopti,
 Hag a lavar d'an holl genfent
 Ho mab, ho merc'h d'ar skol gristen !

8.

Grit d'eomp kompreñ, er barrez-
 Pegen diaes eo gwazienna, [man,
 E kalon dinamm ar bugel,
 Ar Feiz, ar vertuziou santel,

9.

Grit d'ar gerent kompreñ érvat
 Eo da genta d'ar vamm, d'an tad,
 D'ar vamm dreist-holl, war he bar-
 Deski d'ar bugel e bedenn. [lenn,

10.

Sant Millio, patron Plonevez,
 Diwallit skoliou ho parrez,
 Lakit enno hor bugale
 Da greski e doujans Doue.